

Breman 8, ru HOCHÉ 35000 ROAZON

12 lus

bremañ

Niv. 78 MEURZH 1988


BREST-

8-9-10

A VIZ EBREL

Euroskol 

PENFELD 1988



LIZHIRI

Souezhet bras on-me bet e lenn e bremañ mis Du (Nrn 74) ar penad-lenm bet anvet : "Be-leton Breizh : ur gevredigezh". Perak on-me bet souezhet ? Peogwir e kav din n'eo ket bremañ eo ret krouñ ur seurt kevredigezh, nes e vaok an heni eo e vehe bet ret her gober, da laret eo er mare na oa kreñvoc'h feiz hon tud e Breizh a-bezh. Petra o deus graet ar veleion betek-henn aveit ma vo implijet ar brezhoneg en ilizioù ? Netra

Oast eo tamm ha tamm implij hor yezh-ni da get ha kresket eo bet implij ar galleg en he lec'h. Trist eo gwelet beleion 'ho eo'h implij hor yezh-ni ur wech hep miz (ha n'eo ket e pep parrez, ...pell aliese !) en c'hizioù 'so, pe e-pad ur gouel bennak, el heni an Oriant, dre skwer. Marse ne out ket mat hor c'henvroiz kristen meuliñ an Aotrou Doue e Brezhoneg, piv a oar !...

Par koberier implij ar Brezhoneg en iliz get hent ar C'hembraeg e bro Gembre, e c'heller gwelet diouzhtu pegen dister eo-er Breizh, el em eus bet tu da welet pa oar-me du-hont. Perak an dra-se ? D'am soñj, ez eo da gentañ tout peogwir n'eo ket bet lakaet troi-greiz ar Bibl e Brezhoneg en douarn hon tud-ni el ma oa bet graet e bro Gembre. (Arabat ankouat e oa bet troet dija ar Skritur Santel dre urzh an Du-gez Anna Vreizh.) N'ankouamp ket kennebeut ez eo ar douarn da lezem 1563 e voe aotreet implij ar Bibl e Kembraeg gant ar Saizon, e bro Gembre...

Daou zen hepken o deus anseet ha labourer stard aveit ma vo troet ar Bibl e Brezhoneg -La Villemarqué hag ar Gonteg-lla n'eo nemet e 1870 e voe troet penn da benn ar Bibl get ar pastor ar C'hoad a Dremet, da laret eo get ur Protestant ; met get ar Gataliked... netra.

A-c'houde un nebeut amser e c'hellet kavout un droidigezh nevez bet graet get an Tour Tan. Mat eo, suralec'h, met re zivieshat eo d'am soñj, peogwir

ne vo lennet nameit get an dud a out lenn ha skriv ar brezhoneg.

En desped d'ar pezh am eus laret uhelloc'h e kredan-me esperout e vo adstrollet hor seizh beleg-ni get re arall a-veit mad hor yezh-ni hag hec'h implij en ilizioù Breizh.

A wir galon genoc'h,

Alan HERVE (An Oriant)

Kenvroidiñ ker,

Komzet am boa deoc'h e derou ar bloavezh skol deus kudennoù am boa evit kaout eurioù ouzhpenn evit kelem brezhoneg d'an 200 skoliad bennak o doa c'hoant da sekiñ hon yezh e Lise Renan Sant Brieg.

Deut e oa Daniel Jestin (eus ar SWEG) a-benn da gaout ar eurioù ouzhpenn a c'houlenn digant an aotrou Kloareg. "N'eo ket arc'hant a ra diouer" emezañ. Setu e kendale'hen d'ober ar 7 eur kentel ouzhpenn. Met goude vakañsoù mis C'hwevrer e oa kemmet an traoù.

Goulenmet en doa M. Vieux-Loup, rener al Lise, ma ne vefe ket paet ma eurioù ouzhpenn, ha dreist-holl, lakaet en doa Enseller Akademiezh Aodoù an Ianter Nos da c'houlenn ma vefe lennet digant an arc'hant a oa bet profet din azalek derou ar bloavezh-skol, ma kendale'hfen da ober eurioù ouzhpenn.

Plegat en deus ar Rector da c'houlenn an Enseller hag ar Rener. Setu m'emañ laouen tout an dud bremañ.

Soñj ho peus marteze em boa lavaret e oan bet kaset da gabout an Ao. Kloareg d'ar Rectoriñ gant an Ao. Pribavag rener CES sant Nikolaz ar Pelem dre ma ne raen ket trawalc'h evit ar brezhoneg.

Marteze kavec'h un tu da lakaat ar Rannvro da baeañ ma 7 eur ouzhpenn ?

A galon ganeoc'h.

R. Le Bacon (Ploufragan)

DILENNADEG C'HALL

Krog eo sirk bras dilennadeg prezidant ar Republik c'hall. Chirac en doa prometet komz diwar-benn DIWAN zo chomet mut, gant aon da ziskouez e oa bourev yezh ar Vretoned. Mitterand a ra van da chom hep gouzout hag en e vo war ar renk. Kement ha gortoz ar sondadenn diwezhañ, n'eo ket prest da adober promesaou evel ra 1981. Evit Barre moarvat ne zellez ket hon yezh an disterañ preder.

Maechter, poatr ar re C'hlas, he n'eo ket bet klevet o komz diwar-benn al lavn-du diwezhañ n'eo ket sur e tey a-benn da zastum ar 500 sinatur maered ret na vankint ket d'ar Penn all. Juquin ar stalinour kozh, a zo skoazellet gant ar PSU, an LCR, n'eo ket surc'h egetañ. Embannet en deus e oa adu gant difenn ar yezhoù bihan avat. Daoust hag en abeg da se eo he deus gelvet UDB da votin evitañ ? Evit an eil tro evel-just e vo ret votin 'evit an tu Kleiz'. Soñj am eus bezañ graet dija. Ha pa welan paraos emañ ar bed e Breizh e ouzon e chomin er gêr a-benn ar c'hentañ tro.

Loeiz Mahe

Sevel a ra al "Ligue des Droits de l'Homme" (kar-tost d'ar PS) a-du gant difenn ar brezhoneg. Ma ! Kevrenn Kemperle-Konk Kerne da vihanañ. !

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONOU VIHAN

29000 kemper

KOUMANANT BLOAZ 70eur

SKOAZELL : adalek 100 lur.

DIWAN

BETEK PEVARE ?



Kenderc'hel a ra Monory d'ober goap eus Diwan

FALLOC'H FALLAN

Falloc'h-fallañ ez a an an traoù evit DIWAN. Ken fall ma n'ouzer ket betek peur e c'hallo padout. Ar gelennedien hag an implijidi all zo dic'hoar dibaoe an 30 a viz Du. Nac'h a ra an ASSEDIC digollañ anezho war an digarez ma kendalc'hont da labourat a youl evit ar memes implijer. Koulskoude ez eus ur mennad e implijidi dic'hoarpet da genderc'hel da labourat evit ur gevredigezh ha n'eo ket he fal treuzvev argant. Betek hen e kenskoazell an holl re a sikour anezho da zerc'hel ar skolioù en o sav. Betek peur e c'hallint padout avat ?

"EXPOLANQUES"

D'an 18 a viz C'hwevrer e voe dalc'het e Pariz an diskouezadeg "Expolanques" diwar-benn langajoù Europa. René Monory, ministr deskadurezh Gall a voe deut da zigoriñ anezhi. Setu ma voe en em gavet ur 150 bennak a izili DIWAN evit lavaret o soñj dezhañ. Bec'h a savas etrezo hag ar boliserien deut da wareziñ ar ministr.

Harzet e voe 16 den, lod gant un doare feuls, evit bezañ huchet war Vonor. Kefioù-dorn, memes, a voe lakaet dezho a-benn bezañ kaset d'ar c'homi-serdi tostañ ha dalc'het betek peder eurvezh evit darn.

MANIFESTADEG E KEMPER

D'al Lun 7 a viz Meurzh e vanifestas implijidi DIWAN, sikouret gant familhoù ha mignoned, en holl war dro 200 den, dirak ar prefeti e Kemper. Resevet 'oa bet lod anezho gant ar prefed hag a embannas penaos ar prefed hag a embannas penaos n'halle ket anezhañ ober netra evit DIWAN. Lavaret a reas tud DIWAN e oa gaouier ar stad ha treitour an ASSEDIC dre ma asante ober al labour lovr e plas ar stad.

Goude ar vanifestadeg e voe staliet ur c'harr-kampin e-kichen ar prefeti, e-lec'h ma vo atav tud DIWAN, noz-deiz, o c'hortoz ur respont digant ar stad.

bremañ 3

KENDALC'H RANNVRO AR

DIWAN

AR CFDT EVIT UR STATUT OFISIEL

AN DAZONT

Penaos emañ an dazont evit DIWAN ? Goude bezañ em glevet gant DIWAN evit sinañ 9 c'hontrad e miz Even 87, e tistrofe bremañ ar stad war gudenn ar galleg. "Gant tud ha ne soufont ket d'o ger, ez eus peadra da c'hortos forzh petra ha da goll pasianted ! Bep taol ma 's eo bet ensellet hor skolidi war o live gallek eo bet kavet mat. Perak, bremañ, distreiñ war ur gudenn a oa bet diskoulmet e miz Even tremenet ? Da grediñ zo emañ ar stad o klask serriñ hor skolioù. Biskoazh ne asantimp d'an dra-mañ, evidomp n'eo ket posubl echuiñ bremañ gant DIWAN, goude unnek vloaz pa n'eus netra da rebechiñ deomp e-keñver an disoc'hoù !" eme renerien DIWAN. ■

Gwenael Caradec.


KELAOUENN
Auzerenn diennet
brezhoneg - galleg

36-15
TC / KELA

- Keleier ar vro
- Gouelioù, Festoù noz
- Levrioù nevez embanner
- Skol'Uhel ar vro
- C'hiaraoù

FEST NOZ EVIT AR SPI

D'ar Sadorn 23 a viz Ebrel e vo aozet gant strollad ar C'henskoazell Etrekeltiek ur FEST NOZ VRAS e Plañvour (ti ar sonerezh), da 9 eur noz, gant AR SONERIEU DU, Bagad an Oriant Mikael Kerne h.a., h.a... Deuit niverus ! ■



D'ar Yaou 10 ha d'ar Gwener 11 a viz Meurzh e talc'he Unvaniezh CFDT Rannvro Breizh he emvod meur e Sant-Ke-Porz-Oluod. Pleustret ha divizet he deus dreist-holl diwar-benn kudennoù al labour hag ar stummadur en embregerezhioù hag evit an dud dilabour.

Lakaet eo bet war wel ar c'holl implijoù e Breizh hag emdroadur al labour war-du postoù teknikoù teknikañ. Diskouezet eo bet ivez politikezh nevez an embregerezhioù : muioc'h mui e klask renerien an embregerezhioù koulz ha reoù ar velestradurezh goprañ an implijidi hervez e labour pe o merit, hag ober gant ar "management participatif". Da lavarout eo e klaskont lakaat an implijidi da gemer ur perzh oberiant e buhez an embregerezh, met evit paliou tremenet en diavaez dezho. Un danjer bras a zo aze : pep labourer o wiskañ penn-da-benn, hep gouzout dezhañ, kultur ha paliou e labouradeg.

Bez ez eo unvaniezh rannvro ar CFDT penn-da-benn war linenn ar CFDT dre vras. Betek re moarvat peogwir eo bet lavaret e oa prudet da vezañ ki bihan renerien Pariz. Ha koulskoude, bez ez eo ar CFDT ar c'hentañ sindikad e Breizh hag Unvaniezh Breizh a zo unan eus ar

re greñvañ. Bez e c'hellfe eta reiñ muioc'h da anavezout he soñj, ur soñj disheñvel mard eo ret. Dileuriad ar CFDT kreiz e-unan a damalle ne oa ket tost a-walc'h ar sindikad eus kudennoù an diaz, an implijidi war an dachenn-labour. Tamall a rae ar burokratelezh, ar jakobine- rezh, ar c'hreizennerezh. Muioc'h eget n'o deus bet graet ar sindikadoù breizhek o-unan.

Tabut a zo savet diwar-benn an doareoù da stourm a-enep an dilabour. An darn vrasañ a asant, daoust d'ar c'hudennoù, da "vererezh an dilabour" : T.U.C., S.I.V.P., hag all. N'eus bet nemet 16% o lavaret e oa an doareoù-se nemet touellañ ha korvoañ ar re yaou- ank ha da c'houlenn ar 35 eur-vezh ar sizhun.

War gudenn DIWAN, avat, n'eus bet kudenn ebet : an 200 dileuriad, war bouez 4 a zo chomet neptu, o deus votet ur mennad evit ma yafe renerien Vreizh ar CFDT da zifenn Diwan e-keñver Prezidant ar Rannvro hag ar Prefed.

Embannet eo bet ivez e vefe difennet implijidi DIWAN e komisionoù pariter an ASSEDIK na ro c'hoazh gwenneg ebet dezho daoust ma 'zint dic'hoar- abae fin miz Du 1987. ■ T.L.

SKOLAJ DIWAN

C.F.D.T.

AR 6 VET KLAS

EVIT AR BREZHONEG

Setu amañ ar mennad kinniget gant ar sindikadoù SGEN (Sindikad ar Deskadurezh Stad) ha FEP (Sindikad ar Gelennadurezh Prevez) departamant Penn ar Bed ha votet a-du gantañ gant unvaniezh departamant Penn ar Bed ar CFDT (Kengevredad Gall al Labour).

YEZH HA SEVENADUR BREIZH :
AR CFDT
EVIT UR STATUT OFISIEL



Evit ar C.F.D.T., n'eus ket a sevenadur dreist nag a yezh dreist. An holl sevenadurioù, an holl yezhoù a die bevañ. Padal, du-mañ, ez eus ur yezh hag a zo en arvar da vont da get : AR BREZHONEG. Bezomp sklaer : n'eus ket kaoz da zifenn goulenn broadelour-mañ goulenn : kaoz zo da roiñ ar gwir hag ar galloud d'an holl Vretoned, da 'n em zisplegañ, ma faot dezho e brezhoneg. Forzh eo anavezet e war zigresk niver ar vrezhonegerien ; ur yezh az a da get zo un tamm frankiz kollet.

Setu perak e kemero perzh ar CFDT evit goulenn ur statut ofisiel evit yezh ha sevenadur Breizh, da lavaret eo :

- ur gelennadurezh direk, posubl e pep lec'h, en holl skolioù ;
- kenstagañ ar skolioù DIWAN e servij publik an deskadurezh ;
- ur plas pemdeziek er pellwel ha skingomz ;
- ul lañs d'o implij en oberiantizoù sindikel ha sevenadurel er servijoù publik ;
- lakaat panelloù brezhonek e-kichen ar re c'hallek.

Lennit al liamm

Skrivañ da : AL LIAMM
16, stradaed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -

A-benn miz Gwengolo 1988 e vo digoret SKOLAJ DIWAN. Emañ ar Skolaj Diwan o klask un animatour(ez)-edukatur(ez) a genlabourer gant ar gelennerien. Brezhoneger(ez) e ranko bezañ ha skiant-prenet war-dro darempredig bugale ha tud vras a ranko kaout an den.

Kas ho Curriculum Vitae hag ul lizher en em ginnig da : Eil Derezh Diwan - 8, stradaed Hoche 35000 - ROAZON - 99.38.75.83.-

E Brest e vo staliet ar Skolaj. Ezhomm a vo gelennerien barrek war ar brezhoneg hag an danvezioù-mañ :

Ur c'helenner leun-amzer war an danvezioù a denn d'ar yezh, d'al lennegezh ha da skiantoù an den (brezhoneg, galleg, istor-geografiezh, hag all...).

Rener(ez) ar skolaj e vo heñañ (houmañ).

Ur c'helenner hanter-amzer war an danvezioù a denn d'ar skiantoù : matematik, fizik, skiantoù an natur...

Ur c'helenner hanter-amzer war ar saozneg a vo klokaet e implij-amzer gant an danvez all (klasket e vo kaout ur saoz-neger(ez) a-vihanik).

mañ ober darn eus o labour kelenn e brezhoneg (danvezioù 'zo pe lodennoù anezho) ; ar c'hempouez yezh a vo ar 6vet klas DIWAN a vo heñvel ouzh hini ar 7vet, da lavaret eo e vo div lodenn a vrezhoneg evit ul lodenn a c'hallek.

Bez o devo ivez da genlabour gant ar bodadoù-labour a zo da vat o sevel danvez labour evit ar skolaj.

Koment hini a vez dedennet gant hini pe hini eus ar postoù-labour a zo bet kinniget a-us a zo pedet da gas e anv ar buanañ ar gwellañ da Sekretouriezh Eil Derezh Diwan, 8, stradaed Hoche - 35000 - Roazon.

Ar goulenn post a ranko bezañ emañ : ur c'hoarvezadur Vitae displeget warnañ : anv, chomlec'h, oad, studioù hag all ha diplomoù ha barregezh war an danvezioù a garfed kelenn. Diplomoù ha barregezh war ar brezhoneg, skiant-micher.

Ul lizher a zisplego pe- rak en em ginniger. Galvet e vo diwezhatoc'h an dud en em ginnigo evit : un arnodenn dre skrid, ur gentel skouer en ur skol, un diviz gant an dibaberien.

Lukian Kergoat
Rener Pedagogel.

Ret eo d'ar gelennerien-

BREST- PENFELD

8-9-10 A VIZ EBREL 1988

War zigarez 10VET DEIZ HA BLOAZ DIWAN e vo dalc'het goul "EUROSKOL". War-lerc'h kendiviz Landerne e oa deut soñj da dud DIWAN e oa ret mont pelloc'h gant ar preder hag an eskemmoù gant skolioù broioù Europa hag a zo deut a-benn da ziazezañ sistemoù pedagogel oc'h implij yezh ar vro da ziazezañ ha n'eo ket yezh ar stad. Tri tem a zo bet dibabet evit KENDIVIZ EUROSKOL :

- DIVVEZHEGEZH ha DESKADUREZH
- DIVVEZHEGEZH ha KEVREDIGEZH
- DIVVEZHEGEZH ha EKONOMIEZH.



D'ar Sadorn d'abardaez e c'hello an dud ober goulennoù ouz an dud o devo graet prezegennoù, ha reñf o soñj war an danvezioù-se. Fellout a ra da z-DIWAN diazezañ an darvoud sevenadurel va EUROSKOL war dachenn Europa hag an dazont, setu perak eo bet pedet tost da 700 bugel d'en em gavout e Breizh evit ar 7.8.9.10 a viz Ebrel.

Ur goul a vo ivez EUROSKOL gant div abadenn veur :

Gwener 8 a viz Ebrel da 9e noz
JOHNNY CLEGG ha SAVUKA. Nan e ra e saozneg hag e zulu o krou-in sonerezh. Levezonet eo gant ritmoù Afrika ar Su. Stourm e ra Johnny Clegg a-enep d'an A-partheid dre e ganaouennoù.

Sadorn 9 a viz Ebrel da 9e noz
 Un abadenn vras gant kanerien o tont eus pep korn ar Vro. Ur bladenn a vo savet an nozvezh-se.

-Bez e vo evit ar vugale c'hoarioù : stummoù a-bep seurt da lammat war-c'horre ! (600 m² en holl), un tren bihan, abadennoù dudi a vo aozet evit ar vugale ivez, hag ul lec'h stoul evit ar babigoù gant tud d'ober war o zro.

Pegement e kousto ar goul ?

Vignet klok : 120 lur an 3 devezh gant abadenn Johnny CLEGG. (prenet en a-raok er stalioù)

Vignet mont e-barzh hep abadenn Johnny CLEGG : 60 lur.

Evit kaout roll ar stalioù e-lec'h m'emañ an tikiji e gwerzh pellg. : 96.33.91.53/98.04.05.42

EUROSKOL 88 : Ul lec'h eskemm. Standoù a vo dalc'het e Penfeld gant pep strollad o tont eus ar broioù da heul : Nordschleswig, Fryslan, Skos, Kembre, Iwerzhon, Catalunya, Euskadi, Flandrez, Ladin, Slovenia, Val d'Aoste, Korsika, ha Breizh. Duzhpenn 600 bugel eo en em gavo asambles evit 3 devezh. Tro o devo da c'hoari, da goul dudi ha da skoulmañ liammoù startoc'h evit an dazont.

mintin) :

Lodenn 1añ : kinniget gant Roger Gicquel, kazetennar France-Inter.

Klevet e vo etre 10e 30 mintin hag 1 eur abardaez : **Koen ZONDAG** (divyezhezh ha deskadurezh), **Pr MACKEY** (divyezhezh ha kevredigezh) kelennar e Skol Veur Laval (Kebeg), **Herve LE BRAS** (divyezhezh hag ekonomiezh) I.N.E.D. (Paris).

Eil lodenn : KENDIVIZ bras kaset endro gant **Roger GICQUEL** (kazetennar e France-Inter), da 3 e.

UL LEC'H KENDIVIZ : d'ar Sadorn 9 a viz Ebrel e-pad ar c'hendiviz e vo klevet (10 eur



bremañ 6

REDON

GWEZENN

PREZEGENNOU

D'an 18 a viz Meurzh "An Emsav Broadelour etre 1939 ha 1945" gant Bertrand Frelaud.

D'an 19 a viz Meurzh "Les Nationalistes Bretons entre 1939 et 1945" gant Bertrand Frelaud.

D'an 29 a viz Ebrel "Eus Parrezioù Arvorig da Gumunioù Breizh" gant Erwan Vallerie.

D'an 20 a viz Mae "Alkool hag Arallekadur e Breizh hag er Broioù Kelt" gant ar mezeg Guy Caro.

D'ar 17 a viz Mezheven "Ar Gelled kozh hag an Drouized" gant Kristian Guyonvarc'h.

Da 8e30 noz - Kreizenn Sokial-5, straed Guy Pabois - Redon-

ENROLLAN HAG EMBANN

Danvez ar prezegennoù a vo kavet talvoudegezh enno gant tud-all ivez e-diazev Bro-Redon. Soñjet hon eus enrollañ ar prezegennoù. Danvez abadennoù-skingomz a c'hellfe an enrolladennoù bezañ.

Embannet e vo ivez ar strobard brezegennoù peb bloaz e stumm ur c'haier ur stumm brav dezhañ !

Deut e oa Yann Bouessel du Bourg d'an 11 a viz Kerzu d'ober ur brezegenn diwar-benn "Al Lennegezh Vreizhoneg a-hed ar c'hantvedoù". Kavet e vo e prezegen ar c'haier enta. Ar re a efe dedennet a c'hello skrivañ da chomlec'h GWEZENN.

BREZHONEG ER POST

Savet ez eus bet gant GWEZENN, kevredigezh brezhonegerien Bro-Redon un teuliad evit ar postoù, ennañ anvioù brezhonek parrezioù pemp departamant Breizh, geriaoueg ar benn korpren an doare d'ober chekennoù brezhonek, goude ma chekennoù gant un implioa bet goulennet gant un implioa jad eus ar post. "Traoù diazev a rankfe tud ar post gouzout", eme Eil Granville, prezidant Gwezenn.

bremañ 7



Yau 7 a viz Ebrel adalek 5e degener bugale ha tud an holl broioù a gemero perzh e EUROSKOL, ha REDADEG bugale evit lidañ digoradur EUROSKOL, plasenn ar Frankiz e BREST.

Gwener 8 a viz Ebrel EURO-CHOARIOU - SPORT : ar vugale a rizo sport dre skipailh. Ha da 6 eur 30 : **ABADENN** 1añ gant c'hoariva "BEAJ MAELDUINE" savet hag aozet gant Strollad ar Vro Bagan ha bugale Diwan.

Da 9 eur noz : Kentañ abadenn **JOHNNY CLEGG** ha SAVUKA (kanaouennoù e saozneg ha zulu) er c'hwec'h kogn. Kaner brudet tre er bed... da welet ha da glevet

Sadorn 9 a viz Ebrel :

EUROCHOARIOU - SPORT - FORUM
 Da 10 eur mintin : kendivizoù diwar-benn an divyezhezh (en deskadurezh, er gevredigezh, en ekonomiezh).

Da 2 eur goude kreisteiz : Dañs gant strollad **Dihun**, sonerezh gant strolladoù o tont eus Kembre, Euskadi, Slovenia. Da heul e vo klevet Patrick Ewen, Mona Jaouen, Mona Bodenneg, Fanfar Douarnenez, Rock h.a...

Da 8 eur 30 noz : abadenn sonerezh **Breizh-Europa**. Ur bladenn a vo savet diwar an abadenn-se: Glenmor, J.Molyneux, Réves de Gosses, Andrea ar Gouilh, Gilles Servat, Louis Capart, Gwez, Yvon Etienne, Korriganed, Long John Silver, Yann Fanch Kemener ha Bleizi Ruz.

Ha da hanternoz : FEST NOZ VRAS

Sul 10 a viz Ebrel :

Da 2 eur goude kreisteiz : Sonerezh Rock : Réves de Gosses.

Da 3 eur : c'hoariva "Beaj Mael duina" gant Strollad ar Vro Bagan ha bugale Diwan.

Da 4 eur : kinnig Prizioù ar sportoù.

Da 4 eur 30 : Kergrist "Penn-Medisin" (c'hoariva furlukin).

Ha da 5 eur : FEST DEIZ gant Sonerien Du.


Petra vo da welet mod-all ?

azalek an 8 betek an 10 e vo : diskouezadeg skiantel an ABRET, "Beaj e Bro ar Son".

NAONED

KERBENN AR FASKOURIEN

AR G.U.D. E SKOL-VEUR AR GWIR



Hag emañ An Naoned kêrbenn ar faskourien c'hall goude bezañ bet hini ar Vretoned e-pad kantvedoù ? Tu a zo d'en em c'houlenn bremañ, goude darvoudoù miz C'hwevrer er Skol Veur, a ra un heklek hegasus ha trubuilhus da dezenn an Ao. Roques a-zivout ar c'hampoumarv a-hed ar brezel.

D'ar 4 a viz C'hwevrer, eta, en em vode ur bochad tud yaouank e Skol-Veur ar Gwir, izili ar GUD (Strollad Unvaniezh-Difenn) anezho, evit sevel ul lidadeg a-wel d'an holl e enor ar skrivagner Robert Brasillach. Goude un dibunadeg a gomzoù ken diboeil ha dañjerus, ar prezegenner a lakaas e arvesterien da c'houzout e vije adanvet ar c'helva e anv ar skrivagner faskour hag enepuyvez. Hag an holl da strakal en o daouarn, da youc'h al.

Arouez diefedus ur yaouankiz bet sachet a-viskoazh gant ar strolladoù pellañ (agleiz evel a-zehoù) ? Moarvat, peadra da brederiañ koulskoude, dirak arvest un tregontad a gorfoù a-sav-sonn, o astenn o dorn war-zu an gabl en ur yudal a-bouez penn : "Europa, sed aze da yaouankiz !" pe "Bebet Nietzsche, Sorel, Drieu la Rochelle" a-raok kregiñ da ganañ "Les Lansquenêts".

bremañ 8

N'eo ket bet trawalc'h evito lakaat ur skritell a-uc'h dor ur sal, avat, na ganañ kanaouenn faskour. Evit terriñ e naon da "skarzhañ ar varksourien er-maez ar skolioù-meur" en deus kemeret ar strolladig hent burevioù an UNEF-ID (Unvaniezh Vroadel Studierien Bro-C'hall Distag ha Gwerinel) e Skol-Veur al lizhiri. Tokarnoù ha penn-bizhier ganto, ar "c'huderien" o deus kroget gant o program politikel : sevel reuz, dispenn...

Aterset goude o oberenn e burevioù an UNEF-ID e touio ar faskourien n'o doa nemet fraget skritelloù, e oant diarmet, nemet gant "tammou koad" rastellet war al leurenn evit en em virout ouzh enebourien bennak.

"Dek vloaz 'zo e vije bet ordin an taol-mañ. Deuet eo ar studierien da vezañ blot !" setu meizad ar faskourien a-ziwar an taol-distruj. Pennadurezhioù ar Skol-Veur o deus savet klemm dirak al lez-varn avat. War gostez ar studierien eo bet krouet ur "C'huzul evezhiañs", tud enep-faskour enañ, e soñj bezañ ur skoll da aloubadeg ar faskourezh er skol, evel ma 'z eo bet kaoz e Skol-Veur Assas (Pariz- Bro C'hall).

Anavezet eo ar strolladig

GUD e Breizh, koulz en Naoned hag e Roazon (piv 'n eus ket taolet pled ouzh enskrivadurioù pe skritelloù war mogerioù ar Skol-Veur ?). Skourr evit ar studierien ar strollad "politikel" "3ème Voie" (3de hent), e klask ar c'huderien silañ er skolioù-meur danvez henvoazel o frogram : na sovedel na kevalour (met an trede hent e-trezo), ar yuzevien hag an arabiz er-maez (ton anavezet), broadelouriezh, difenn ar C'hornog, ... Danvezioù a vez klevet komz diwar o fenn e genoù m'ar c'hodennou-jestrek an Talbenn Broadel (FN) a lavarit-hu ? E gwirionez, ma kemeromp an azer da genveriañ langaj ar strolladoù-se, pep hini a orin an tu-dehou pellañ, e spurmantomp diforc'hoù memestra :

- P'emañ Le Pen o klask c'hoari ar "Super Reagan" war hent ar frankiz arboellek en em sav ar GUD a-enep an Amerika (nac'h an "Aozadur evit Englev an Norzh-Atlantel -NATO e saoneg) ken d'an Unvaniezh Soviedel.

-Rebec kentañ an FN ouzh an estrenien hervez a zo o vuol da virout o zishevelded (o relijion, o yezh, o zoare bevañ, o vroadelezh orin keal) kentoc'h eget liv o fas. Evel-se e c'hell Le Pen en em ginnig etre Martinikiz pe Harkiz Aljerian, lorc'h enno gant o gartenn moulet "nationalité française" warni. Stourm a ra ar GUD en a-enep meskaj ar madoù, etre ar re wenn hag ar re all.

-Kristen rik eo emsav Le Pen pa gerzh ar re all war hent ar raog-gristenelezh (paganelezh), a dalv evito kement na paradoz kollet hon hendadoù. Ul lodenn anezho, hag aze emañ an dalc'h ivez, a glask war aodoù ar bed keltiek respont o furchadegoù speredel (drouizelezh komprenet a-dreuz da skouer).

-Doujañs ouzh gwir ar mirenolezhioù da vezañ hervez o sevenadur gant ar GUD, met dismantr didruze kement tra a savfe teñvalijenn war sevenadur ar Stad-C'hall peurbadus, war roll ar re all.

PENNAD-KAOZ

GALL TI AR BREZHONEG

GANT MARK GUILLOU

Diwallit ! N'em eus ket taolet em fenn o lakaat a-du gant mennozhioù ar strollad GUD dre ma gavit gwashoc'h ar re all (pe ar c'hontrol). Klask kompren penaos en em elokont dre o langaj ne lavaran ket.

A-benn ar fin, ganedigezh ar GUD a ziskouez daou fed d'an nebeutañ :

-Rikladur ar strolladoù politikel gall war-zu an tu-dehou pellañ. E 1981 e veze le-sanvet faskour Chirac, betek ma tiwanfe luskad an FN, gwiroc'h faskour anezhañ. Hennezh deuet a-benn da vezañ brudet e bount e izili pellañ da sevel strolladigoù spontusoc'h (skouer : GUD).

-Azginivelezh ar Vroadelouriezh, savet en-dro evel benveg a-enep ur rumad labourerien (an dud divroet) pe evit adunvaniñ ar "Vroad" en dro d'un ideologiezh (ar sokialourien gant ar "Marseillaise" er skolioù).

CUAB

UR PEGSUN, PEMP DEPARTAMANT

Komzet hon eus amañ d'ja eus pegsun bruderezh ar Rannvro "Bretagne" ; oc'h aroueziañ he fevar departamant. Unan all damheñvel zo bet savet gant ar c'h-CUAB (Kuzul evit Adunvanidigezh Breizh), oc'h aroueziañ ar 5 departamant.

Siwazh n'eus ket muioc'h a vrezhoneg war hini an Naoned eget war hini Bourges. Met mar karit prenañ an hini gwellañ eus an daou e kousto deoc'h 5 lur an tamm, pe 3 lur mar goulennit 50 da vihan, digant ALTERNANTES 19 straed Nancy - 44300 - NAONED -



E PARIZ

Bremañ E-pelec'h e vo Ti ar Brezhoneg e Pariz ?

reñ lañs d'ur vuhez kevredigezhel brezhoneg e Pariz.

Bremañ Peseurt abadennoù a vo aozet emañ neuze ?

M.G. Abadennoù a vo digor o danvez war ar Bed, predoù a-bep seurt bro, sonadegoù, filmskeudennou, abadennoù Ghadenn ar Vro, diskouzhadegoù, luc'hskeudennou, livajoù hag all...

Tu vo da c'hoari ivez biroù, kartoù ennañ. Kinniget e vo ivez kentelioù war an urzhataerezh ha war ar brezhoneg eveljust. Splann eo e vo degemeret mat an holl gant ma teuint ouzomp e brezhoneg.

Bremañ Hag en eus leo'hial all estregetañ ma c'hell kejañ enno ar vrezhonegerien an eil gant egile ?

M.G. Aozet e vez un abaden brezhoneg bep merc'her da noz e Ti ar Vretoned e Montparnasse, met n'eo ket a-walc'h. Setu pe rak e oa ret deomp sevel un ti all.

Dastumet gant Paol ar Meur.

Bremañ Peur e vo digoret ?

M.G. War-dro miz Even 88. Ret e vo poaññ brav evit kempenn an ti met dre c'hañs ez eus ur skipallh kalonek evit kas an traoù war-raok. An holl o dije c'hoant kemer perzh ellabour a vo degemeret mat ganomp.

Bremañ Petra a vo pal Ti ar Brezhoneg ?

M.G. E bal a zo bodañ an holl vrezhonegerien a zo o chom e Bro Pariz hag ar re a zo o pleustrin war hor yezh eno evit kas ar brezhoneg war-raok ha

KORN OG
LEVRIOÙ PLADENNOÙ HAG ARZ Keltiek
22, straed ar Vur - 29210 MONTRoulez - ppz 98/63.25.40.

bremañ 9

YEC'HED

AR BERRANAL HAG AR



Pinvidikat tra eo ar yec'hed. Gwechall koulz hag hiriv ez eo stag buhez an den hag e blianedenn ouzh e yec'hed. Ma ez eo aet ar yec'hed pe kentoc'h an doareoù-louzaouin da heul boazamantou an dud, eo a-wechoù diwar-goust ar glañvourien. Gwechall e ouie pep hini kavout en natur ar plant a zegase gwellaer-m'de yec'hed. Hiriv an deiz pa vezer klañv ez er diwar dizh dadi an apotiker tostañ ha gantañ e vez roet deoc'h louzeier da gemer dre an daou benn...

An den a-vremañ a vez ken pizh gant e amzer, ken e vuzulfe efed al louzeier gant un horrol-treazh. Padal ar re gozh hag a lavare : ar c'hleñved a zeu war varc'h hag e ya kuit war droad. Er c'hantvedoù tremenet eo bet gwelet an traoù o vont war-raok, ha kleñvedoù 'zo, mont war rouesaat dre ma vezent liammet ouzh an diouer a yec'hedouriezh pe ivez ouzh ar mod d'en em vagañ. N'eo ket bet degaset kemm d'an traoù gant un taol gwelenn-hud, nann, hir eo bet kenteliñ an dud.

Hiriv avat, ne seller ket mui ouzh ar plant a veze ken przius all d'hon kentadoù ha forzh penaos gant an natur aet da lastez, eo gwelloc'h diwall outo, kement ha kement a lous-tonioù a vez taolet koulz war an douar, er stêrioù hag en aer...

Ar yec'hed a hiriv a vez muioc'h-mui liv ar politikerezh gantañ war e c'horre. N'eo ket e sellfen ouzh ar politikerezh evel ur gwallglenved bennak, met diouz an dibabou graet gant an dud e karg eo e teu pare da c'houlz Yann ! E-keit ma vo dibabet ganto reiñ miliardoù a

lurioù nevez da sevel spontailhoù nukleel, e kavimp ken-lies ha bennez tud o kestal hag o c'houlenn an aluzenn evit ma vefe profet d'o ospital pe ur gontell-flañc'hañ elektronek, ur skanner pe n'ouzon ket peseurt benveg all c'hoazh, bet disoñjet e "boutek ar stad Nedeleg".

An devezh all e reseven ul lizher a-berzh Komite Penn ar Bed a-enep ar C'hleñvedoù-skevent hag an Drouk-skevent. Imor a zevas ennon goude bezañ e lennet rak ar re-mañ a ginnige din va sikour da ober gant ar gwenneien an boa lakaet unan hag unan dre faoutenn ur podespern da reiñ pouez d'am femoc'h. Drouk a savas ennon rak bet on bet va unan dalc'het e-pad daou vloaz gant ar berranal ha skiant an eus prenet digant doareoù ar vedisineriezh ofisiel da bliediñ gant ar c'hleñvedoù-skevent.

Pa zevas anat din seblantou ar berranal, goude bezañ darbet mougañ gant meur a varrad, e tivizis eveljust mont da welet ur "mezeg-skevent". Hemañ goude sellet ouzh disoc'hou ar skinskeudennou, a ginnigas din kemer a-bep seurt louzeier a-veradoù, a loaiadoù, a flistradennoù pe c'hoazh da sankañ war bouez va biz-yod en un toull ha n'eois anezhañ tamm liam ebet gant ar skevent...

O vezañ ma ne wellas ket an traoù e ris va soñj tremen hep skiantouriezh ebistel doujus "goursez ar vezeged" emañ e sezva e Pariz (lezen war an Dereadelezh, mennad 75). O treiñ kein ha revr da ouizeien ar yec'hed, en em gaven va unanig, enkrezet hep gouzout resis ouzh pe sant goullenn ar pare. Ha ma teufe an diskoulm eus tu medisineriezh ar bobl, emezon ouzhin va-unan ? N'eo ket eus Rika Zairai eo a fell din komz, met eus ar bareourien.

Daou anezho a glaskas skañvaat din va bec'h. An hini kentañ a oa bigouden anezhañ, kement-se n'eo nag un enor na kennebeut-all un digarez da sevel uheloc'h e revr. Va hini avat a rankis diskouez dezhañ e ler. Goude bezañ sellet outañ a-dost, ec'h embannas din krak ha krenn ha ne oan ket dalc'het

gant ar berranal, darbet e voe din kouezhañ a-c'hin o klevet an nevezinti. Ha diwar e guzuliou ec'h evis bennez betek daou pe dri litrad eus un gledi-hud graet gant dour beruet enañ gwirziou linad. N'on ket evit lavaret deoc'h pere eo perzhioù mat al linad, hogen a-hed an deiz gant toull va bragoù digor d'ar seizh-avel, rak o klask pareañ va skevent, e oan o veuziñ va louez. E

An eil pareour a oa eus kostez Montroulez. Hennezh a oa ur souezh gwelet an dud o teread davedañ eus pevar korn ar vro. Ur gammadenn a reas d'e veg pa embannis dezhañ ar rak hag ar perak eus va gweladenn, met fiziñs a roas din. E Zourarn a lakaas a-blad war va bruched, hag a-dreuz va dilhad e santen gwrez o c'hounid anezhañ. E-keit ma oa gant e daol vezegeñ, e kleven chuchumuc'h gwallbedennou a-zistag evel m'hen rafe ur sorser eus donañ koadier Afrika. Ma reas tro-wenn ar bigouter e krede din e kasfe al leonad, e daol da benn vat. Siwazh din, ne zeuen ket a-benn da gaut an disober eus va c'hleñved pa oa en en e washañ, ken e oan en sell cheñch micher. Krog e oan da goll kaeron pa zevas betek ennon kelou eus Friedmann hag eus e vrec'hidigezh vuzhhus. Piv oa an den ?

Ur medisn alaman e oa Friedmann. E penn-kentañ ar c'hantved-mañ e tizoloas ar medisn yaouank-mañ, ul louzaouenn a roe ar pare hag a harze ouzh an drouk-skevent gwalenn an XIXvet kantved. Ober a reas "anningzochin" anezhi, ha roet an anv : Brec'hidigezh Friedmann" dezhi gant e genseurted. Al louzaouenn nevez dizolot ne oa ket koulskoude ur wir vrec'hidigezh par d'ar re all, nann.

Loc'het mat e oa Friedmann gant e vicher. Er bloavezh 1904, e vez arnodet evit ar wech kentañ "bzhennig Friedmann" o tout eus korf ur vaot marvet diwar an drouk-skevent e Doureg Berlin. Diwar 50 gouenn e loened, mervel a reas ar re all. Er bloavezh 1907, dirak ar re vrudetañ eus e genvredeur,

YEC'HED

VREC'HIDIGEZH FRIEDMANN

e strinkellas Friedmann dourenn e vamm e louzaouenn ennañ ha kregiñ a reas da bliediñ da vat gant an drouk-skevent.

1912 : evit ar wech kentañ e vo anavezet efedusted louzaouenn Friedmann war skiant-yac'haat Mab-Den. 1923 : ur bovidad arbennikourien vrudet a chom gant o fri war ar gloued o velet disoc'hou sebezus louzaouenn Friedmann da reiñ bec'h d'an drouk-skevent. Gant ar brud a zeu war e benn, e kavas ivez Friedmann enebiezh, falla-griezh, droukrañs ha gwarizl war e hent.

Er bloavezh 1933 e teu ar gailoud e Bro Alamagn gant an Nazied. Yuzev e Friedmann. Teodeget ha teodetet eo bet forzh pegement, ken ma vo klas-ket c'hwenn an e loeroù ha kaset ar paotr Friedmann dirak al lez-varn. Petra bennak ma voe en didamallet, e tibabas ar mezeg hent an harlu ha mont da chom e Monaco. Eno, e varvas er bloavezh 1953 disoñjet gant an holl.

Eus Monaco e veze kaset louzaouenn Friedmann e Bro-C'hall. Kement-mañ avat, ne oa ket diouz c'hoant CALMETTE na kennebeut evit plijout d'an Institut Pasteur, a oa bet nevez dozvet ganto ar B.C.G. En e skridoù, e embannas CALMETTE traoù faos ha diglok a-zivout Friedmann, a ziskler an Dr BENAIÇHE (*) dre ma oa anv Pasteur doujet bras gant an holl. Lavaroù CALMETTE a dalvezas neuze kement ha re an Aviel.

Er bloavezh 1953, bloavezh marv Friedmann, e voe embannet ul levrennig gant an embannadurioù "MALOINE", skrivet gant an Dr Herve (*), ur breizhad anezhañ hag a oa o chom e mare-se, e rannvro-Bariz. Ober a ras an Dr Herve gant ar Friedmann. Hemañ ha mezeged all o er bloavezh 1957 e c'helljont tremen hep oberata 3000 den dic'het gant kudennoù skevent. Friedmann an Dr Benaiçhe a skrive er bloavezh 1960 "en ur em 30 vloaz en Hospital al Leu er bloaz louzaouenn ha roet ar pare d'ouzh an drouk-skevent da ouzhpenn 10 000 klañvour".

En e levr deuet diwar ar

moull e 1957 e skrive Jean Palaiseau (*) diwar-benn "ar Friedmann" e teue ar pare gant 90 % d'ar re a veze gant ar berranal.

En Europa a-bezh koulz lavaret eur aotreet da ober gant "ar Friedmann", en Europa a-bezh a lavaran, nemet e Bro-C'hall, strizh he revr hag he spered. E Bro-C'hall eur prederietoc'h gant amzer-dazont an tier-ye'hed eget gant yec'hed ar re a zarempred anezho. Ur vezh eo hiriv an deiz klevet e marvet den-mañ den gant ur barrad berranal pa en defe gallet kaout ar pare. Difennet groñs eo komz diwar-benn ar Friedmann ha gouzañvet e vez menestra gant "Gourses ar Vezeged" ma vefe graet gantañ dre guzh. Gouzañvet e vez ivez ma varvfe tud zo gant o gwalc'h a "ventoline".

Re alies c'hoazh, e seller ouzh ar berranal evel ur c'hleñved mezhus, ur c'hleñved ha ne c'heller ket kaout ar pare dioutañ, abalamour d'ar vro ha d'he zent-anzer ha dreist-holl, a lavarfen, abalamour da zigasted ar vezeged o-unan hag a bleg doujus evit al lodenn vrasañ anezho d'al lezennoù embannet e Pariz gant o dileuridi pouanner o yalc'h, evit ma chomfe dizek ha digelou ar pellañ ar gwellañ, ar re glañv, ma bevont int diwar o c'houst.

E Breizh ez eus moarvat mezeged a ra gant ar vrec'hidigezh Friedmann (unan an eus kavet). Ar pezh a zo, ne fell ket dezho e vefe brudet kement-se gant aon e kouezfe warno gwelenn ar gantiz. Netra nevez eta gant Bro-C'hall he 96 departamant hag he spered berboellig,



pe "Theophiline", pe louzeier all pa c'hellfent ur wech da vat lakaat tevel stull enkre-zus o skevent klañv.

Meur a desteni a zo bet kasat din dre lizher o prouiñ efedusted dizoladenn Friedmann -klañvourien a oa zoken gant glozioù-skevent, kaset-degaset d'un ti-ye'hed d'egile, hag o deus gwelet o skevent kleizen-niñ goude ar bikadenn gentañ Friedmann.

